

Sant Nicodem - e pep amzer  
Pedit evidomp hor Zalver  
En ho chepal 'vel d'hon tadou  
Goulennit d'eomp bep seurt madou  
Selaouit hor pedenn  
Aotrou Sant Nicodem.

## I

Nicodem a lignez forz vad  
Da pharisiñ dre e stad  
Den a lezenn hag enoret  
Dre an holl bobl hag ar brinsed.

## II

O velet miraklou Jezuz  
O klevet e gomzou salvus  
Hen a gomprenas a neuze  
Oent merkou splenn eus eun Doue.

## III

Goulskoude ne fias ket kreñn  
Dizoloñ d'an dud e gredenn  
Rak-se 'vit n'em zerc'hel kuzet  
Hen ieas en noz d'har c'havet.

## IV

"Mestr, eme Nicodem neuze  
Nioar e teut a berz Doue  
Deus ar miraklou a c'hret  
N, eus tu deomp da veza trompet.

## V


Jezuz respontas a nevez  
M'hen diskleri gant gwirionez  
Den n'antreo em rouantelezh  
Nemet dre eil ganidigez.

## VI

Morse ne vo pur hoch ene  
Na Biskoaz resevet en nenv  
Ma ne ve bet sanktifiñ  
Dre Zour, dre ar Spered sakret.

## VII

Kerkent Nicodem souezet bras  
D'hor Zalver Jezuz a laras  
Penaos eun den dija oajet  
C'hell eun eil gwech beza ganet.



C'hui zo doktor eus al lezenn  
Hag eur mestr bras pharisiñ  
ha ne ouiech ket an dra-ze  
Laras Jezuz d'ezañ ive.

## IX

Goude Jezuz a zisklerias  
Da Nicodem mysteriou bras  
Kredi 'reas e gwirione  
Gant aktou bras a drugare.

## X

Eur vech e ourguilh diskaret  
E galon da Zoue rentet  
Da Jezuz e phomass fidel  
Ha de gelennedur santel.

## XI

Difenn reas Jezuz bepred  
A eneb d'har pharisiñ  
Morse n'e skuize e gouraj  
Oc'h enebi cuz o erraj

## XII

Goude pa volas gant glac'har  
Jezuz maro war ar C'halver  
Ieas evit hen ambaumi  
Ha warlerc'h 'vit hen interri

## XIII

